

E lec'hioù all ivez e c'helloc'h kas ho skolidi da welet traoù dedennus gant displegadennoù e brezhoneg :



ENEZ GROE

Buhez martoloded Enez Groe

Klasoù dizoleiñ a vez kinniget gant Ekomirdi Enez Groe. Prantadoù zo a c'hell bezañ kaset e brezhoneg : skoulmoù, gweladenn Kerlard (ti hengounel ar besketaerien-peizanted), beilhadeg kontadennoù...

Ekomirdi Enez Groe – 02 97 86 84 60
ecomusee.groix@orange.fr
http://ecomusee.groix.free.fr



KEMPER

Dizoleiñ glad Kemper ha Bro-Gerne

Gweladennoù kêr Kemper ha Mirdi Breizh an Departamant evit dizoleiñ kêr ar Grenn-Amzer, an iliz-veur, ar gwiskamantoù...

Ti ar glad – Kemper – 02 98 95 52 48
secretariat.patrimoine@mairie-quimper.fr



LANNUON

Evit gouzout pep tra war an dour !

Ar gevredigezh Ti ar besketaerien a aoz a bep seurt abadennoù evit gouzout hiroc'h war ar pesked, saotradur an dour, kelc'hiad an dour, ar bleunioù...

AAPPMA Lannuon - Ti ar besketaerien – Lannuon
02 96 37 70 18 – aappma.lannion@wanadoo.fr
http://assoc.pagespro-orange.fr/peche.lannion/

Ha c'hoazh :

BREC'H ☺ Ekomirdi Sant Degan
02 97 57 66 00 – ecomusee.st-degan@wanadoo.fr

GWENRANN ☺ Mirdi ar paludoù holen
02 40 23 82 95 – museedesmaraisalants@wanadoo.fr
www.maraissalants.com

HENBONT ☺ Espace de découverte du cheval
02 97 89 40 30 – info@sellor.com – www.sellor.com

LOGONNA-DAOULAZ ☺ Kreizenn bageal Moulin Mer
02 98 20 75 00 – lmv@moulin-mer.fr – www.moulin-mer.fr

LOKEORED ☺ Mirdi ar bilhaouerien hag ar rektor
02 98 99 62 36 – museedespilhaouers@wanadoo.fr
http://www.pnr-armorique.fr/fr/expositions/recteur.html

PERROZ-GIREG ☺ Sant C'hireg
02 96 23 22 11 – denislebras@cegetel.net
http://lebrasde.perso.cegetel.net/

PLOUGASTELL ☺ Mirdi ar sivi
02 98 40 21 18 – contact@musee-fraise.org
http://musee-fraise.net/

PLOUVIEN ☺ Skolig al louarn
02 98 40 00 64 – skolig-al-louarn@wanadoo.fr
http://pagesperso-orange.fr/skolig-al-louarn/skolig.htm

POULDOURAN ☺ Skol ar c'hleuzioù
02 96 91 57 48 – secretaire@talus-bretagne.org
www.talus-bretagne.org

SANT-NIKOLAZ-AR-PELEM ☺ Mirdi ar skolioù war ar maez
02 96 29 73 95 – musee.ecole.bothoa@wanadoo.fr

SKAER ☺ Ti-feurm Gi Pensec – 02 98 59 45 75

Maketenniñ : Fabrice Véronneau (zzazz@free.fr) / Moullañ : Cloître

Klasoù hag obererezhioù dizoleiñ

Classes et activités de découverte en breton pour les scolaires

Ebrel 2008 (stumm brezhonek)

Levrig embannet gant skoazell



Une version française de ce livret est téléchargeable sur Internet :

www.ubapar.org/bretongallo/actu.html

UBAPAR
UNVANIEZH BREIZH EVIT BUHEZIÑ AR BROIOÙ WAR AR MAEZ



Dennad-Start

Ar vugale a vez roet dezho ul levrig war ar c'hampoù vakañsoù brezhonek bep bloaz.

Ar skolaerien hag ar gelennerien ivez o deus o hini er bloaz-mañ ! N'eo ket evit mont da vakañsiñ avat... Evit bevañ ur prantad divoutin ha pinvidik gant o skolidi ne lâran ket...

KLASOÙ DIZOLEIÑ E BREZHONEG ? EVEL JUST AUGUST !

Anavezout ar vugale hag ar grennarded e-maez ar skol, krouiñ ur spered strollad etre ar skolidi, lakaat ar vugale da vezañ kurius ha digor o spered, pleustriñ war un danvez en ur mod skiantel (arvestiñ, furchal, dielfennañ), studiañ war an dachenn... Setu ar pezh a vo tu da vevañ e-pad ur prantad dizoleiñ.

Prantadoù espar e vez ar c'hlasoù dizoleiñ evit an holl glasoù. Gwiroc'h eo c'hoazh evit ar c'hlasoù divyezhek. E-pad unan, tri pe pemp devezh e c'hell ar vugale bevañ en un endro brezhonek ha deskiñ geriaoueg arbennik a denn eus an natur, ar mor, an diorren padus ha me oar, gant brezhonegerien sot gant an traoù-se.

Teir c'hreizenn dizoleiñ a c'hell ho tegemer e brezhoneg penn-da-benn e-pad meur a zevezh. Un toullad mirdioù ha kreizennoù all a c'hell aozañ devezhioù pe gweladennoù e brezhoneg ivez. Na chomit ket da dortal, kit e darempred gante da c'houzout muioc'h ha da sevel ho raktres gante...

Ubapar


Ur rouedad kevredigezhioù e Breizh eo UBAPAR (Unvaniezh Breizh evit buheziñ ar broioù war ar maez). Pledañ a reomp gant ar buheziñ hag an diorren lec'hel.

Strivañ a reomp da vroudañ implij ar brezhoneg hag ar gallaoueg evit an obererezhioù dudi ha dizoleiñ : diorren ar c'hreizennoù vakañsoù, stummañ buhezourien ha renerien (stajoù BAFA ha BAFD), krouiñ binvioù labour, brudañ... Skoazellet eo hon labour gant Kuzul-rannvro Breizh, Kuzulioù-meur Penn-ar-Bed ha Morbihan ha Renerezh-rannvro ar Yaouankiz hag ar Sportoù.

UBAPAR
Sant Klomer
56250 Sant-Nolf
02 97 45 47 14
ubapar@mouvement-rural.org
www.ubapar.org/bretongallo/actu.html

Katell Chantreau, e karg eus diorren an dudi e brezhoneg hag e gallaoueg
16F straed Maunoir
35000 Roazhon
09 53 35 56 44
katell.chantreau@mouvement-rural.org

Taolenn



- ★ Kreizennoù a c'hell degemer klasoù evit 1, 2, 3 devezh pe muioc'h (gant bod ha boued)
- Kreizennoù ha mirdioù a zegemer klasoù evit ur weladenn heñchet pe un devezh dizoleiñ d'ar muiañ (hep bod ha boued)



An Oaled

14 straed an Ti-kêr
29870 Treglonou
02 98 04 07 04
anoaled@wanadoo.fr
www.anoaled.com

Temoù ar c'hlasoù dizoleiñ

Ar mor

Studiañ al loened mor, klask e-barzh ar bezhin, furchal dindan ar reier, tapout kranked ha pesked gant an daouarn, sellet outo gant gwerennoù-kreskiñ, studiañ penaos e vevont, deskiñ an diforc'h etre ar pioka hag an tali moan, sellet ouzh al laboused e bord an Aber Benniged hag anavezout anezho.

Skol-gentañ betek al lise

Glad, sevenadur hag istor ar vro

Gouzout muioc'h war anvioù lec'h Treglonou, selaou mojennoù an Aberioù, mont da welet mirdi ar vezhinaerien ha savadurioù kozh (chapel Prad Pol, Pont an diaoul...), dizoleiñ micherioù gwechall.

Skol-gentañ betek al lise

An natur

Dizoleiñ ar c'hoad hag ar maezioù liesdoare tro-dro ar greizenn dre ur rallye natur, mont e-barzh koad Trouzilid d'ober c'hoarioù santout, sevel ul lestr amprevaned ha gouzout muioc'h war chadennoù ar magañ.

Skol-gentañ betek al lise

An diorren padus

C'hoarioù bras da zizoleiñ petra a dalv an diorren padus, mont da gaozeal gant ul labourer-douar bio, dizoleiñ danvezioù al lastez ha penaos adaozañ paper, sevel ur vilin-avel ha deskiñ muioc'h diwar-benn an dour hag an energiezhioù.

Skol-gentañ betek al lise



AR VRO

An Aber Benniged, 5 munut war droad eus ar greizenn : plantennoù holengar, laboused, loened mor.

Koad Trouzilid, 10 munut war droad : plantennoù, gwez, loened, istor.

Ar maezioù : kleuzioù, plantennoù, glad istorel, laboused...



AN DAFAR PEDAGOGEL

Ouzhpenn 250 levr ha kasedig war loened, plantennoù, sevenadur, istor, kontadennoù, bannoù-treset, pladennoù sonerezh Breizh, listri pesked hag amprevaned, gevellunedennoù, gwerennoù-kreskiñ, skramm tele, magnetoskop, sonenroller, c'hoarioù hengounel, teltennoù, kezeg-houarn...



AR GREIZENN

*Bod : 48 bugel d'ar muiañ
Boued : betek 80 plas er sal-debriñ*

Un ti bras gant ur sal degemer, 3 sal klas, ul levraoueg, un oaled gant un ostaleri ha c'hoarioù (melldroadig, bilhard Bro Holland...), ul liorz bras ha kloz gwez enni.

Monig, ar geginerez, a ginnig boued lipous fardet er greizenn. Boued ar vro a vez fardet ivez : kig-ha-fars, krampouezh ha boued all diouzh ar goulenn.



AR PRIZIOÙ (2008)

- ⊕ Klasoù (buheziñ ha bod ha boued) : Etre 33 ha 35 € dre zevezh dre vugel hervez ar mare eus ar bloaz.
- ⊕ Un devezh buheziñ er greizenn : 175 € (1 buhezour + dafar pedagogel) - 120 € un hanter-devezh.
- ⊕ Un devezh buheziñ er skol : 185 € (1 buhezour + dafar pedagogel) - 130 € un hanter-devezh.

AN OALD A GINNIG IVEZ...

- ⊕ Kreizennoù vakañsoù e brezhoneg
- ⊕ Kentelioù brezhoneg (kentelioù-noz ha kentelioù-tanva er skolioù)
- ⊕ Devezhioù dizoleiñ war an natur, al lastez... er skolioù pe er greizenn
- ⊕ Kentelioù sonerezh
- ⊕ Degemer strolladoù : bod ha boued





Kreizenn bad touristelezh ha dizoleiñ an endro

CPTDE

Garzuhel
29190 Brasparzh
02 98 81 47 50
cptde.brasparts@epal.asso.fr
www.epal.asso.fr

Temoù ar c'hlasoù dizoleiñ

An dour

- ⊕ Kelc'hiad an dour
- ⊕ An energiezh dre zour : penaos sevel rodoù elvennek ?
- ⊕ Troiad dizoleiñ : deus an eienn betek ar stêr
- ⊕ Ar poull-dour hag ar wazh-dour : studienn fizik, loened ha plant, ober un akwariom

Skol-vamm ha skol gentañ

Ar c'harzhaoueg

- ⊕ Labour-douar ha natur
- ⊕ Dielfennañ ar gweledvaoù
- ⊕ Parkeier ha pradeier
- ⊕ Kleuzioù ha girzhier : kefridi, loened, plantennoù

Skol-vamm ha skol gentañ

Ar c'hoad

- ⊕ Ar plant : anaoudegezh, keñveriadenn
- ⊕ Al loened : tresoù ha roudoù, sellet gant evezh ouzh al loened bihan-tre
- ⊕ Chadennoù ar magañ
- ⊕ Perzh ar c'hoad en ekosistem
- ⊕ Perzh an den

Skol-gentañ betek al lise

Lanneier ha touarc'heier

- ⊕ Dizoleiñ ar Yeun Elez hag ar Menez Are
- ⊕ Loened ha plant : gouennoù rouez ha tachennoù naturel gwarezet

Skol-gentañ betek al lise



AR VRO

Endro naturel dispar stummet gant ar c'hleuzioù hag ar pradeier, e kreizig-kreiz Park an Arvorig hag ar Menez Are, nepell eus lenn Brenniliz.



AR GREIZENN

*Bod : 105 bugel d'ar muiañ
Boued : betek 120 plas er sal-debriñ*

Kreizenn digoret e 1993, ur sal-debriñ gant ur gwel ledan war Vrasparzh, 3 savadur disheñvel da gousket enno (1 dre glasad), 3 sal gelenn, 1 sal liesimplij, levraoueg. Tost d'an ti : ur greizenn varc'hegañ, un dachenn c'hoari, 2 boull-dour pedagogel, koadeier, pradeier, gwenojennoù...

Boued mat hervez ezhommoù ar vugale. Diwallet e vez eus meuzioù ispisial rediet evit bugale 'zo.



AN DAFAR PEDAGOGEL

Luc'heilerez, skinwel, skeudenroller, luc'hvanner, diapositvoù, urzhiataer gant kevreadenn Internet, skanter, luc'hskeudennerez niverel, kamenroller, gevellunedennoù, gwerennoù-kreskiñ, nadozioù-mor, kartennoù IGN, bizhier roued.



AR PRIZIOÙ (2008)

- ⊕ Koulzad uhel : adalek 37,25 € dre zevezh dre vugel (2 zen deuet dre glasad digoust)
- ⊕ Koulzad izel : adalek 33,50 € dre zevezh dre vugel (digoust evit an holl dud deuet)
- ⊕ Un devezh buheziñ : 210 € (1 buhezour + dafar pedagogel).

AR CPTDE A GINNIG IVEZ...

- ⊕ Un devezh bale e brezhoneg er Menez Are kenaozet gant ar gevredigezh ADDES hag ar CPTDE : ur valeadenn natur hag ur valeadenn kanet gant ur pik-nik da greisteiz.
- ⊕ Kampoù vakañsoù e brezhoneg e kreizenn varc'hegañ ar Rugornou e miz Gouere



Centre Forêt Bocage

Ti ar C'hoadoù

5 hent an dachenn sport
22160 Ar Chapel-Nevez
02 96 21 60 20

centre-foret-bocage@wanadoo.fr
www.centre-foretbocage.com

Temoù ar c'hlasoù dizoleiñ

Ar c'hoadoù hag ar c'harzhaoueg

Mont da bourmen e Koad ar Markiz ha Koad an Noz. Heuliañ roudoù loened gouez ha studiañ o reol-voued (yourc'hed, moc'h-gouez, kizhier-koad, sourded...). Selaou laboused, sellet outo ha sevel lochoù koad evito. Lenn ar gweledva (da betra servij ar c'hleuzioù ? ar girzhier ? penaos e vez plantet gwez ?) ha kompren gwelloc'h mont en-dro ar vuhez en natur, da zoujañ muioc'h outi.

Adalek re vras ar skol-vamm betek al lise

Kontadennoù ha natur (e-kerzh ar goañv)

Petra a zeu ar bleunioù, ar gwez da vezañ e Koad an Noz, e-pad ar goañv ? Petra a vez graet neuze gant loened gouez ar c'hoadoù ? Selaou kontadennoù e korn an oaled ma vo klevet komz eus bleizi, korriganed, karrigell an Ankoù... C'hoari gant an ijin hag ar c'horf o sevel ur gontadenn hag o leurrenniñ anezhi.

Adalek re vras ar skol-vamm betek ar CM2

An diorren padus

AN ENERGIEZHIOÙ : Penaos ez a ur vilin-avel en-dro ? Da betra servij ? Peseurt diforc'h zo etre an energiezhioù fosil hag an energiezhioù padus ? Sevel maketennoù, tabutal.

Adalek ar CM1 betek ar skolaj

BOUED HA LASTEZ : Eus pelec'h e teu ar boued a zebromp ? Petra eo al labour douar padus ha biologel ? Perak debriñ frouezh ha legumaj ? Penaos e vez meret al lastez graet ganeomp ? Labourat e liorzha pedagogel ar greizenn, implij ar c'hompst.

Adalek ar CP betek ar skolaj

Glad ha sevenadur Breizh

Mont da welet ur vilin-dour, ur botaoouer-koad, ur piker mein. En em gavout gant brezhoneg-erien ar vro. Dañsal ha kanañ. Fardañ bara pe krampouezh. Kaout plijadur gant ar c'hoarioù hengounel. Labourat war ar sevel-ti hag istor Kreiz-Breizh o vont da welet un iliz pe un ti-feurm.

Adalek ar CE2 betek ar skolaj



AR VRO

Eus ar Chapel-Nevez e weler un dremmwel traoniennek ha glas-tre gant Pradoù, kleuzioù, girzhier, hentoù don e-leizh. Un dremmwel garzhaouek eo. Sevel saout-laezh a vez graet kalz er vro. Emañ ar gumun etre Koad ar Markiz (brudet evit e wez fav hag ivin, kalz plant ral en arvar da vont da get) ha Koad an Noz (mengleuzioù arc'hant ha gwez beuz ennañ).



AR GREIZENN

Bod : 50 bugel d'ar muiañ
Boued : betek 80 plas er sal-debriñ

3 sal labour, ur porzh-c'hoari hag ul letonenn vras, liorzha ha jardin gant pennoù yêr hag ur c'havr, loch sistr, un dachenn sport e-kichen ar greizenn, ur rouedad hentoù-bale, koadoù bras 10 km pelloc'h...

Boued eus ar c'hornad ha boued biologel fardet er greizenn.



AN DAFAR PEDAGOGEL

Luc'heilerez, luc'hvanner, urzhiaerioù, levrioù, kasedigoù dre glevet pe dre sellet, gevellunedennoù, dafar en em lec'hiañ...



AR PRIZIOÙ (2008)

BUHEZIÑ :

- ⊕ Gwengolo / Here ha Genver / C'hwevrer : 18 € dre zevezh dre vugel
- ⊕ Du / Kerzu : 17 € dre zevezh dre vugel
- ⊕ Meurzh / Ebrel : 20 € dre zevezh dre vugel
- ⊕ Mae / Even : 22 € dre zevezh dre vugel

BOD HA BOUED

- ⊕ 16 € dre zevezh dre vugel betek ar CM2
- ⊕ 17 € dre zevezh dre vugel adalek ar 6^{vet}

TI AR C'HOADOÙ A GINNIG IVEZ...

- ⊕ Baleadennoù natur e-pad an hañv dreist-holl
- ⊕ Stajoù brezhoneg e-pad dibennoù-sizhun
- ⊕ Gouelioù : Un devezh en natur, En-dro d'ar gwez avaloù e miz Du
- ⊕ Standoù diwar-benn an endro da-geñver gouelioù sevenadurel
- ⊕ Kampoù vakañsoù evit ar vugale
- ⊕ Feurmiñ al lec'h e-pad an dibennoù-sizhun (bod ha boued pe bod hepken)





Mirdi ar Vezhinaerien

Hent Sant Mikeal
29880 Plougerne
02 98 37 13 35

ecomusee.plougerneau@club-internet.fr
<http://bezhin.club.fr/index.html>

Temoù ar c'hlasoù dizoleiñ

Moaien zo da aozañ ur prantad meur a zevezh ennañ, gant bod ha boued en Oaled e Treglonou.

Bed ar vezhinaerien

Gweladenn displeget Mirdi ar vezhinaerien e Plougerne (implijoù ha labourioù gant ar bezhin gwechall hag hiziv an deiz), Porzh bezhina ar C'horejoù (fornioù-soud, sec'hadurioù), bagoù-bezhina kozh ha modern, kêriadenn Meneham nevesaet (Kerlouan), emgavioù gant bezhinaerien ha dizoloadenn ar gouennoù bezhin war an aod vev.

Skol-vamm ha skol gentañ

Glad naturel

Dizoloadenn an aod vev, an tevenn, an draezhenn, stummadur hag emdroadur an aod, plantennoù ha loened an arvor (kregina, pesketa, sellet pizh, doareoù gwareziñ natur ha bevliesseurtes an arvor, merañ al loustoni, kredennoù poblek...).

Skol-vamm ha skol gentañ

Glad sevenadurel

ILIZ KOZ : Dizoloadenn dudius Iliz Koz, iliz parrez kozh Tremenac'h, bet koñfontet gant an traezh e-kerzh ar Grenn-Amzer.

CHAPEL PRAD PAOL HA PONT KRAC'H : Roudoù eus amzer ar Gelted kozh kemmesket gant reoù ar gristenien, mojennoù diwar-benn Pont Krac'h anvet ivez Pont an Diaoul gant tud ar vro...

TOUR-TAN ENEZ WERC'H : Istor an tourioù-tan ha buhez an diwallerien displeget e-barzh tour-tan Enez-Werc'h, an hini uhelañ en Europa graet e mein kersanton, greunvaen hag opaline e 1902.

DAÑS ROUND : Dañsal ha kanañ ar round pagan henchet gant kanerien ha danserien eus ar vro.
Skol-vamm ha skol gentañ



Mirdi ar Micherioù kozh bev

Bourc'h – Ti-feurm Kerampran
29560 Argol
02 98 27 79 30
vieux-metiers@wanadoo.fr
www.argol.fr

Ur mirdi bev eo se. Bemdez e teu ur 15 den eus ar gevredigezh Micherioù kozh ar vro da lakaat buhez er mirdi. Goût a ra brezhoneg darn vrasañ anezho. A stal da stal e c'heller eskemm gant tud a-youl vat ha dizoleiñ jestroù gwechall : kordenner, kantenner, nezourez lin ha gloan, botaoer-koad, turgner-koad, divouller, gov, dantelezerez, kofourez, gwiader, ober mel, greññ ar bodoù roz ha gwez, ha me oar.



AR PRIZIOÙ (2008)

Strolladoù bugale degemeret a-hed ar bloaz (20 skoliad d'an nebeutañ) :

⊕ 2 € dre vogel, digoust evit an dud deuet (1 evit 8 bugel).

Stalioù diskouez

Stalioù diskouez a vez kinniget ingal : touzañ an deñved, diennañ, ober amann, fardañ krampouezh war an tan, pourmen war rederig, livañ ar gloan, labourat an douar gant ar c'hezeg, poazhañ bara, kannañ dilhad er poull-kannañ, krazañ kafe, ober soavon... (deiziataer embannet en nevez-amzer)

Devezhioù dizoleiñ

Gweladenniñ an taouarc'hegoù. Stal skoulmoù mor (deskiñ ober skoulmoù). C'hoarioù hengounel Breizh : birinig, boultenn, kilhoù kozh, paledoù war blankenn...